

Eonenn ma c'havell

Ganet on bet e traoñ an aod
War ar bezhin,
Ouzh ma luskellat avel vor
Flourik ha sin.

Ur vorverc'h he blev melen-ruz
Am c'hutuilhas,
War he maen-lorc'h on bet maget
Gant mel hec'h askre noazh.

'Vel ma zadoù rederien-vor
On bet douget,
A wagenn da wagenn,
Ouzh an avel gornôg.

O kantreal tro-dro d'ar bed,
Diarc'hen,
Diskabell,
N'em eus tra kavet en tu all
Da gened ma c'havell
Dispar.

War an traezh hir, ô mor divent !
An eon gwenn-kann
'Vel ur vorverc'h en ma c'halon
Bepred a gan.

Diwan ma bro !

Ha dalc'het out ma bro gant soñjennoù langis ?
Diouzh feunteun Baranton c'hoarzhadegoù lirzhin
A sav gant Viviana hag an drouiz Marzhin
Skoulmet o c'harantez gant daeroù tener-glizh.

Stourmet az poa gwechall ouzh an avelioù kriz
A c'hwezhe dizehan eus ar menezioù krin,
Met da vibien, dalc'hmat, a ouie bep mintin
Adsevel da vanniel gant nerzh o yaouankiz.

Pa stlak ar Gwenn-ha-du war lein ar Menez-Bre,
E trid hor c'halonoù war-c'hed eus ar roue
A ouife dont timat e penn an arme veur.

Ha diouzh ar maezioù don, diouzh kadoù Brekilien,
Diwar an aodoù splann, war-sav marc'hegerien !
Pa diwan hon dazont, diskarit an dizeur.

D'an Erminig

O Breizh ma bro !
Ma c'harantez
Ennout emañ
Ster ma buhez.

Ha lenn a ran
Ouzh tor ar run
Keleier flamm
Hag am dihun.

Marc'hegerien
E penn an trec'h
Eus park al laz
A zo erru,
Echu ar c'hloaz
Hag an harlu.

Ha paotred taer
Ha diskabell,
Biskoazh ken kaer
Ouzh da gavell,

A zoug banniel
An esperañs,
Ar Gwenn-ha-du !
Hon demeurañs.

Diougan evit Arzhur

Eus enez Avalon deus war-gaout ar c'hleze
Bet dalc'het evidout gant Itron veur al lenn,
Da c'hortoz ar mare ma teuio d'ar vojenn
Bezañ kaset da wir gant youl fur ur Roue.

Bodet ouzh an Daol-Grenn marc'hegerien dispont,
Bet galvet gant Marzhin an hudour hep e bar,
O deus touet o le mont ganit diarvar
Da stourm ouzh an Den Glas ha Ramzed ar c'hoad don.

Diwar da Gastell-Karr renet gant ar Sterenn,
Pa vez ar Vretoned o c'hwezhañ dir ha tan,
N'eus nemedout a c'hell mestroniañ an emgann,
Arouezenn an Triskell o skediñ ez talgenn.

War barlenn Baranton, melezour karantez,
Diskaret an arvar, skubet hon ambloari,
E c'hellimp diastal ouzh kalon hor bro-ni
Bevañ disoursi-kaer e skeud al levenez.

Pa vo steuziet da vat war dremmwel ar C'hornôg
An heol hag an deiz e puñs an ezvezañs,
Ar Gelted ouzh da heul, e bourzh an esperañs,
A zilestro didrouz war aodoù Tir-na-Nóg.

Mojenn

Tristan hag Izold

Luskell da soñj

Lez an hun da ziskenn war lusk an houlenn-vor
E sioulder da galon,
Ha luskell da spered, e zivaskell digor,
Ouzh lufr an dourioù don.

Kae war bevenn an aod pa sav an heol war wel,
Aour e gelc'h en e gann,
Hag e c'helli klevout chouradenn an avel
Ouzh an eon gwenn-kann.

Ar gouelini war-nij e barr an oabloù glas
A zesko dit an hent,
Ma c'helli mont gantañ dishual ha dic'hloaz
War roud da blanedenn.

Tra ma vo diouzh an noz ar Seizh Ejen-Arat
Ouzh da ren dianken,
Gant kentañ skleur an deiz stag fiziañs da lagad
Ouzh ar Werelaouenn.

Pa vo dalc'het da voud, a wagenn da wagenn,
Gant roued al langis,
Kae davet ar vorverc'h a deu d'az tiarbenn
War hoal he chalandiz.

Tizhet ganit ar pal war-zu glannoù tramor
E porzh al levenez,
Lez da vag gant he c'houisk...
Klemmvanus kanenn-vor o vervel war an traezh.

Diougan evit Izold

Aet on da heul galv an andon
Dre hentoù kev koad Brekilien,
Kontet he deus din pep delienn
Mojenn vurzhdus Iwerzhon.

Erru gant feunteun Baranton,
A hirvoude gant an anoaz,
Ha splann war he melezhour noazh
E talme didrouz da galon.

War wel e teuas un heizez,
Treuzet ganti dor ar roudour,
Ouzh luftr teñval he lagad flour
E savas ennon karantez.

Na te, rouanez en Iwerzhon,
Am dalc'has dindan gazel-ge !
Touet em boa neuze ma le
E sentfen ouzh da levezon.

Douget gant from veur an Hirwazh,
Em eus tizhet glannoù tramor,
Luskellet gant an delenn aour,
Ha setu-me, dilorc'h, dinoaz,

Boudedeo d'az tiarbenn,
Da ginnig dit ma c'halon c'hlan,
Bezañ rouanez hep diamant
E liorzhoù kaer koad Brekilien.

Kan d'ar wennili

Distroet out a-denn-askell
Kannadig koant an nevez-hañv !
Souchet dindan mantell ar goañv,
Ouzh da c'hortoz omp bet ken pell.

Da gorfenn wenn dantelez skañv,
Flouret ken kaer gant an avel,
A zibun deomp ar rimadell
A gas da get ar mizioù kañv.

Pa gan ar skrilh er prajoù don,
Da nijadenn e gwenn ha du
A skuilh levenez a bep tu.

Ha pa vimp gant hent Avalon,
Adlañs d'an neñv ouzh lusk an tizh
Sonadeg veur ar yaouankiz.

Run heol

War ar run
An heol
A zihun
Ha, bagol,

Galvadenn
Da galon,
Ez laouen,
A zasson.

Ouzh anneo
Ma buhez,
Houarn beo
Karantez,

Ha tan-flamm
Ar c'hreisteiz,
Diwar lamm
Ar pardaez,

Hor c'haso
Tizh-ha-tan
Da lid hol levenez
Dindan liñsel an noz.

Huanadenn

Ouzh al loar-gann
Sklaer an tevenn,
Ar mor a gan
Un abadenn.

War an draezhenn
Da galon c'hlan,
Huanadenn
Strewet er vann.

Pell diouzh an dud,
Pell diouzh ar reuz,
Tañvet em eus
An died hud.

Ha diarc'hen
E kutuilhan
War an draezhenn
Da galon splann.

Na kaerat tremenvan !

Ouzh luftr ho taoulagad e trivli ma c'halon,
Hag e fell din mirout bann-heol hoc'h ene
A skuilh war ma spered sklaerder un oabl hinon
Par da valzennoù roz pa zispak ar beure.

Pa zeuit diarc'hen, telennadeg heson,
War eskell ar mintin da zilenn an ere
D'hor skoulmañ dienkrez, e tassion em c'hreizon
Ur youl yaouankiz n'eus 'met ouzhoc'h e tere.

Ur wech, diouzh ar pardaez, ez aimp war an tevenn
Davit hon eured veur o tont d'hon diarbenn
Ouzh lusk-dilusk ar mor, e barr al levenez !

Ha pa vo deut an noz, gant al loar en he c'hann,
Ne c'houlennin tra ken un drailhenn garantez
Souchet ouzh ho prennid, na kaerat tremenvan !